

# KANTIK

## SANT KORINTIN

*TON : Pegen kaer ez eo Mamm Jezuz.*

*Diskan :*

D'hor zant Patroun muia karet,  
 Da zant Korintin benniget,  
 Henor, gloar, meuleudi bepred !

4.

Mil bennoz d'ehoc'h, o va Doue,  
 Da veza roet da vro Gerne  
 Eur seurt Patroun ebarz enn Ee !

2.

Ne oa c'hoaz nemed eur bugel,  
 Pa zeuaz Doue d'her gervel,  
 Hag hen raktal holl dilezel.

3.

'Vit servicha Doue hebken,  
 En em dennaz enn eul lochenn,  
 Pell diouz peb kear ha diouz peb den.

4.

Va Doue, dre ho madelez,  
 Eur peskik a zeue bemdez  
 Da roi d'ar Zant magadurez.

5.

Troc'hi a r  e evit he bred,  
Troc'hi a r  e ar pez oa red,  
Hag ar pesk drant ha iac'h bepred.

6.

Grallon gant he lez a zeuaz ;  
Gant h  e besk ar Zant ho magaz,  
Hag ar pesk ker beo ha biskoaz.

7.

Korintin n'oa eur breur santel :  
Mont a ra da velet Primel.  
Primel oa kam, ann dour oa pell.

8.

Sant Korintin 'ra eur beden :  
Kerkent e sav eunn eienenn  
Hag a hiboud enn he gichen.

9.

Pell ez eaz hano Korintin ;  
Eskop oue gret g  ant sant Martin :  
Ann Env a dliaz mousc'hoarzin.

10.

Mousc'hoarzin a dliaz ann Ee  
O velet e penn bro Kerne  
Eunn tad k  er mignoun da Zou  e.

11.

Piou 'nivero he labouriou,  
He iuniou hag he b  edennou  
'Vit silvidigez he boblou ?

12.

Ar feiz skignet e peb parrez,  
Kristenien vad e plas tud gouez :  
Pebez burzud ha pebez frouez !

13.

Eunn deiz, eunn eal a ziskennaz,  
Daoulagad ar Zant a zerraz,  
He ene d'ann Env a gasaz.

14.

Eur zant ne jom ket pell kuzet :  
Doue 'n euz mall e ve brudet  
Evit beza dreizhan pedet.

15.

Patroun benniget, var ho pe  
Nag a bed a gavaz pare,  
Pare d'ho c'horf ha d'ho ene !

16.

Nag a vech dre ho pedennou  
Ez eo bet guelet ann Envou  
O roi gliz ha glao d'hor meziou !

17.

Sant Korintin, c'houi zo euruz,  
C'houi zo euruz ha gallouduz :  
Hirio dreist holl beet truezuz !

18.

Ho preac'h santel zo askavet ;  
Ra vo varnomp ato savet  
'Vit hon diouall diouz peb pec'hed !

19.

'Vit hor miret e gras Doue,  
Ma vimp ato guir vugale  
D'ehoc'h, Patron saint tud Kerne !

---

IMPRIMATUR :

Quimper, 24 Novembre 1885.

SERRÉ, Vicaire général.

---

Kémpér, mouillet e ti AR. DE KERANGAL.